

M A O W A R A R M A E Z

(troidigezh gant Per Bourdellez)

ALIOU D'AL LENNERIEN !

Ar pennad-mañ a zo ur rentañ-kont savet gant ar VAOOURIEN o-unan eus al labour o deus graet war ar maezioù en hor bro. N'eus ennañ eta nemet o menozioù-int. Goulenn a reomp digant Kristenien Vreizh ha Beleien Vreizh hen studiañ ha neuze e vo embannet ar pezh o devo int o-unan da lavarout war gement-mañ.

Evit ma vo aesoc'h an danevell -mañ da gompren e roomp un nebeudig diskleriadurioù.

- 1 - Alis: gwelout paj.10 : An Emsaverez a oar pep tra !
- 2 - " Pa voe lakaet frankiz war ribloù an Erdr gant an dud aet da verennañ war zouaroù ar berc'henned ". Ar rentañ-kont ne lavar ket sklaeroc'h an traoù, dre ma'z eo moarvat un taol anavezet-mat. Kompren moarvat kement-mañ : Ribloù an Erdr a zo perc'hennet gant tud pinvidik : etre o ziez hag ar stêr ez eo dezho ivez ar c'hlazenn. Tud ar bobl, eus kêr-Naoned, ne c'hellont ket mont war ar c'hlazenn da lonkañ aer yac'h a-hed an dour. Setu: ar Vaoourien o deus pedet ar broletourien da zont da verennañ da ... " di Vari-C'hlažioù ! " Deut int a gantadoù.
- 3 - Labour-Eost a zo evit ar pennad-amzer tremenet gant ar Vaoourien o labourat war ar maez. An destenn c'hallek a lavar " Stage d'été " Gallout a reer lavarout ivez en ur virout ar ger gallek " staj " : staj an eost.

Paotred an Dispac'h nevez-mañ n'int ket evel re an Dispac'h gall a rae gant gerioù bras. Ar Vaoourien avat a gomz evit bezañ intentet. Ar re-mañ a zo o zreid war an douar. Evit ober gant troioù-lavar implijet da vat bremañ hon eus lakaet ar ger " kontestadeg " e-kichen " DIASANT ", met ret eo diwall na vefe ar ger " kontestadeg " ur ger goull: ar Vaoourien ne ASANTONT Ket da blegañ da ved an arc'hant, ha setu !

0

Al labour-mañ a zo ul labour brevez ha n'emañ ket da vezañ lakaet er c'henwerzh.

An embannerien

" EMSAV AR YAOUANKIZ HA KOUERIEN AN " OUEST "

*

120 Dispac'hour yaouank, studierien ha micherourien a zo bet o labourat ar ar maez e-pad Hañv 1970. Setu amañ ar rentañ-kont eus al labour-esot-se savet ganimp " HIR-GERZHADEG ", en enor da hir-gerzhadeg Mao hag e baotred...

A-benn lakaat an Dispac'h da darzhañ eo ret dalc'hmat soñjal en NIVER BRAS ha mont davet an dud. N'eo ket gwir e vefent sioul: klemm, grozmolat a reont etre o dent da lavarout o " diasant ", o enebiezh ouzh ar bed a zo o pouezañ warno. EVIT MA SAVINT O MOUEZH EZ EO RET LABOURAT GANTO

Arabat ober evel " Alis " avat! Alis a soñj dezhi e oar pep tra, ha ne vez dalc'hmat nemet ur respont en he genoù : (!)." Ar Fuzuilh !". Kalz a zispac'herien a zo evelti, ne zalc'hont kont ebet eus ar pezh a soñj an dud; lakaat a reont an dud da grediñ ez eo gwir lavarioù ar Vourc'hizien. Terriñ a reont ar skoulm naturela zo etre an dud wasket hag an dispac'hourien. Reizh eo o menozioù; diskiant eo o oberoù. Ne ouzont ket an tu da lakaat an holl da gemer perzh, da sammañ o lod en Dispac'h.

Ar gentel desket gant an dispac'hourien o labourat war ar maez eo homañ " Plantit ho treid en douar ! "

1 9 6 8 - 1 9 7 0

Ouzhpenn daou vloaz'zo eo krog emsaverien an dispac'h, micherourien ha studierien anezho, da zaremprediñ al labourerien-douar vihan, en " OUEST ".

Met n'eus bet manifestadegoù a unaniezh-pobl nemet e Bro-Naoned (pa voe skrapet ar Ministr Guichard; pa voe lakaet frankiz war ribloù an Erd gant an dud aet da verannañ war zouaroù ar bec'henned " (2) (3)

E departamantoù all an " OUEST " e voe graet "labour-esot". Savet e oa bet an dra re vuan; peurliesañ ne oa ket bet deut da vat. Adalek miz Eost e oa savet e pennoù darn eus an " eosterien " c'hoant da " boellata " da "rezoniñ" da eñvorifañ war stad an traoù. Ne gavent ket e strake an dispac'h buan a-walc'h. Mont a rejont kuit eus an eil deiz d'egile, " evel ma ra an douristed", a lavare ul labourer-douar. Darn all a save re uhel o c'hribenn: " ME a oa war bardelloù ! ME a zo dispac'hour !". Deut e oant da reiñ kentel, hag ur wech roet o c'hentel, ne glevas ken ar gouerien keloù ebet anezho... Setu penaos e oa bet kont a-raok 197

E miz Gouere ha miz Eost 1970, ouzhpenn 100 a re yaouank, studierien ha micherourien, o deus labourer e maezioù an " OUEST ", adalek ar Seurzh (Sarthe) betek ar Finister, eus ar Morbihan da Aodoù-an-Hanternoz. Kalz a " hir-gerzhadegoù " all a zo bet e Frañs en hañv-se.

A R P A L I O U

KENTAÑ PAL - N'eo ket evit ober un tamm-tro war ar maez e oa bet savet al labour-eost, met gant ar soñj da genderc'hel ha d'ober labour padus... En hañv-mañ, pezh hon eus klasket ober da gentañ, eo diskar ar mojennoù hag ar gevier : " Ar studier n'eo mat da netra; an dispac'her ne glask nemet terriñ dre blijadur " .. ha diskouez gwir zremm an Dispac'h, en ur vont da labourat d'ar park, bevañ gant al labourerien-douar, ha kemer lod en o diduamantoù.

RAKTAL ez omp bet barnet ganto DIWAR HON OBEROU. Setu ar pezh a lavare ul labourer-douar e-pad un emvod rentañ-kont : " P'am eus gwelet paitred dilorc'h o tont d'hor skoazellañ war hol labour pemdeziek, o klask kompren pegen diaes eo hor buhez, hag o klask ganimp penaos sevel ar samm diwar hor chouk; p'am eus gwelet merc'hed yaouank o sikour hor gwraez war ar gegin ha war-dro ar vugale; p'am eus o gwelet o kousket er c'hriagnol dre ma ne oa ket a weleoù evito, em eus soñjet e oa " OUEST-FRANCE " un tamm mat a vern-k... hag en devoa bountet pennadoù gevier ennomp diwar-benn an " dorrerien " hag an " distrujerien " .

KENTAÑ TRA EN DEUS AN EMSAVER D'OVER EO BEZAÑ DEGEMERET MAT, GONIT FIZIAÑS TUD AR MAEZIOU, HA DISKAR GEVIER AR VIROURIEN !

EIL PAL : - Soulmañ hon emgann ouzh hini ar re eus al labourerien-douar hag a zo " Paitred-Araok "

Santout a ra ar gouerien an ezhomm da gompren ar bed emaint o vevañ ennañ, da gompren penaos e teu ar gopitalouriezh d'en em silañ el labour-douar ha da gas kuit an darn-vuiañ eus al labourerien-douar. Santout a reont an ezhomm da c'houzout penaos e stourm ar vicherourien hag ar studierien, da c'houzout petra eo ar sosialouriezh, petra eo an dispac'h... hag e klaskont daremprediñ " diasantourien " ar c'hêrioù.

Setu perak e c'hellomp, ni studierien ha micherourien, entanañ o speredoù a-enep ar gaou graet dezho hag ar vizer taolet warno; reiñ dezho da gompren ez eo ret SKEIÑ DISPONT, hag A-UNAN: ar re a zo gwasket er c'hêrioù da heul ar re a zo gwasket war ar maez. En ur heñchañ an emzivizoù, en ur gemer perzh e " taolioù " al labourerien-douar, en ur sevel " taolioù", " oberoù, ni ivez (evel ma lavaromp pelloc'h), e lakomp ar gouerien da gompren buanoc'h.

MET N'EUS NETRA D'OVER EVIT SKOULMAÑ HON EMGANN OUZH HINI AL LABOURERIEN-DOUAR, NEMET E VEFE BET TIZHET AR PAL KENTAÑ: BEVAÑ HA LABOURAT GANTO.

TREDE PAL : EN EM UNANIÑ GANT AR BOJBL EVIT AR BOJBL . Aet e oamp war vaezioù an " QUEST " evit sikour " paotred-araok " al labour-douar d'en em strollañ. Alies n'en em anavezont ket, adalaek ma vezont tregont kilometr an eil diouzh egile. N'o devez digarez d'en em welout nemet e bodadeg ar Sindikad pe an Emglevioù-kenoberiañ (Kooperativoù), hag e santont kriz, pep hini anezho, pegen e-unan, pegen digenvez emañ.

Bodañ kourerien ha dispac'herien yaouank, dezho d'en em anaout - lezel ar gouerien da gemer ar penn - mont ganto da welout re all - setu ar pezh a c'hellomp ober. Pa ziskouezer d'ul labourer-douar war ur gartenn ar c'hantonioù en e zepartamant ez eus emsaverien o labourat enno, e lavar : " Neuze'ta, e pep korn ez eus labourerien-douar evit o degemer, divizout ganto, o heñchañ etrezek atantoù all. Penaos eta, gant kement a dud war-dro, ez omp-ni c'hoazh ken fall strollet ? " Hag alies e klask ar gouerien gwelout hag ober anaoudegezh gant al labourerien all a zegemer evel-se dispac'hourien en o ziez.

PENAOE E OA BET AOZET AL LABOUR-EOST

An holl a zo ali e oa bet aozet al labour-eost re vuan. Ur strollad-aozañ a oa bet savet ar 1-añ a viz Mezheven gant emsaverien eus Pariz hag eus Roazhon. An emvodoù kentañ gant ar gouerien a grogas d'an 10-vet. Met a-benn neuze e oa kalz a labourerien-douar en o farkoù war al labour, ha ne c'hellent ket dont.

Ur "staj " (devezhioù-studi) mat, eme ar gouerien, a vez aozet tri miz ~~en~~ a-raok, amzer da zisplegañ pep tra d'an dud, da welout pegoulz e vo pres-labour, pegoulz e vo e ti al labourer-douar kerent-diavaez "

Ma voe aozet fall diouzh tu al labourerien-douar, ne voe ket aozet gwelloc'h al labour-eost diouzh tu ar studierien hag ar vicherourien. Eus an eil deiz d'egile e voe kinniget dezho mont war ar maez da labourat... Darn anezho ne ouient netra eus al labour-douar. Darn a voe kaset asambles ha n'o doa biskoazh betek neuze graet labour-emsav asambles.

Un dra bennak a vat a zeuas koulskoude eus an diaoz: kourerien yaouank a gemeras a-wechoù penn ar "staj", hag a voe urzhierien ampart. Met a-benn al labour-eost da zont, e vo ret aozañ gwelloc'h, en a-raok, diouzh an daou du.

PESEURT EMSAVERIEN A YEAS WAR AL LABOUR-EOST

Emsaverien yaouank ha diakuit e oant (nemet ar sternierien) rak ar re goshoc'h ne c'hellent ket dilezel o labour-emsav el labouradegoù hag e karterioù ar c'hêrioù.

Soñjet e oa bet e oa dieupoc'h ar yaouankiz: amzer o devez, karg-tiegezh n'o devez ket. A-hend-all, digor eo o spered, tan a zo en o c'halonoù. N'eo ket tud desket a zo ezhomm, leun o fenoù a dezennoù da ziskargañ d'ar gouerien.. Ar re yaouank a zo emsaverien wirion, prest da labourat start, da vevañ ur vuhez kalet, ha dreist-holl: D'OBER MIGNUNED GANT AR GOURIEN.

Ha kement-mañ a zo gwir penn-da-benn: dre ma hon eus bet fiziañs er yaouankiz, hon eus kavet ha kredet kas ouzhpenn 100 emsaver. Ha diwar al labour-eost eo bet dibabat goude-se ar re a zo pennoù " Emsav ar Yaouankiz " er bloaz-mañ !

Un dra a zo evelkent ha n'hor boa ket soñjet ennañ. Al labourerien-douar o deus degemeret mat ar re 22-24 bloaz. Met pa o deus gwelet al liseidi, ez int bet souezhet-bras, hag o deus kavet diaes gwelout paotred 16-17 vloaz oc'h ober politikerezh. Ha n'eo ket respontoù krak-ha-krenn ar yaouankizoù-se a c'helle plaenaat an traoù !

En ur ger berr, Emsav ar Re Yaouank en deus graet labour vat e-pad an hañv. Ne c'heller ket lezel al Liseidi a-gostez, met ret e vo en em glevout sklaer gant ar gouerien. Ret e vo ivez : kenderc'hel d'o daremprediñ, kas dezho kalaouennoù ha traktoù, ha goulenn o re, distreiñ d'o gwelout deiz pe zeiz evit diskouez e talc'h an emgann da vont war-raok.

AR GOURIEN DAREMPREDET

An DIASANT (ar gontestadeg) a zo en e greñvañ e-touez ar gouerien -etre, ar re eo diazezet warno ar C.D.J.A. (Bodadoù al Labourerien Yaouank) Ar re-mañ a zo tud hag a ra o labour peurliesañ o-unan, hep mevel na devezhour. Ardivinkoù o deus, bet prenet war zle. Start eo o labour. Sunet e vezont gant ar gouerien binvidik hag ar gapitalourien (dre ar prenañ hag ar gwerzhañ) , gant o aotroù, ar perc'henn (dre ar gouel-mikael da baeañ hag an dresañ war o c'houst), gant Kef-Stad al Labourerien-Douar (Credit Agricole), gant ar genlabouradeg pe an emglev-kenoberiañ (ar C'hooperativ) emaint stag outi, lonket enni (ar Genlabouradeg a bourvez d'al labourer-douar laboused ha magadur hag a bromet prenañ ar poñsined lartaet gantañ; al labourer a bromet un niver poñsined, ha warnañ e vez an holl riskl) -- Daoust da gement-se ez eo gwelloc'h stad ar c'houer-etre eget hini ar c'houer paour. E-touez ar gouerien-etre e weler zoken bremañ o'n em zidoueziañ daou rummad disheñvel :

1- Diouz un tu, ar re o deus savet o chouk pa'z eo deuet da vat an traoù ganto hag a zo o treiñ e-du gant ar gapitalourien. Ar re-se eo a gomz ouzh ar Ministr, hag a-du emaint, kalz pe nebeut, gant raktresoù Mansholt ha Vedel.

2 - Diouzh an tu all, ar re n'o deus netra da c'hortoz ken nemet ar rivin, ha bezañ lakaet da broletourien pe en ul labouradeg pe er gêr. Ar re-mañ eo an niver bras. Int eo tu kleiz ar C.N.J.A. (ar re yaouankañ anezho, rak da 35 bloaz e rankont mont en FNESEA pe er MODEF)

Gant ar gouerien-etre hon eus labouret kalz. Gouzout mat a reont n'eus netra e-gor evito nemet ar rivin. Ar re-ha n'o deus ket a zle (krog int da gozhañ peurvuiañ) a grenn diwar o dispignoù evit gellout padout. Ar re-se betek bremañ a laka an ASANT hag ar SENTIDIGEZH da ren, met skubet e vezint a-raok nemeur : DRE VRAS EO PREST AR GOUERIEN-ETRE, ABALAMOUR D40 STAD VANTRUS HA D'AR BERV A SAV EN O SPERED, DA ZEGEMER MENOZIQU AN DISPAC'H. Digant ar re-se hon eus bet an degemer kalonekañ, ganto e oamp evel mignoned-vrezel, hag hon darempredoù ganto n'int ket bet hepken darempredoù politikel, met gwir vignoniezh.

Gant ar gouerien baour ivez hon eus graet labour vat. Re nebeut a zo bet graet (e Departamant Aodoù-an-Hanternoz, dreist-holl) met ar pezh a zo bet graet a zo bet talvoudus-bras. Nebeutoc'h a zle o deus ar gouerien baour eget ar re-etre aet o stal da fall; met nebeutoc'h a arc'hant ivez. A stad-vevañ hag o labour a zalc'h da vont war washaat. N'eo ket c'hoazh digor o speredoù, met prest int da zigeriñ, ha ret e vefe el labour-eost da zont, mont daveto. Startoc'h eo labourat ganto, ha ret eo kaout gwetur ha teltenn, rak ne c'heller ket chom pell en un ti paour da lakaat dispign ha koust dezho.

N.B - Ret eo diwall ivez da vont dalc'hmat da diez ar re a zo a-du ganimp ha mignoned vat dimp. Aesoc'h e vefe evel just, sevel ganto strolladoùigoù, met ar pezh a zo d'ober eo en em lakaat dindan o renerezh ha bezañ kaset ganto da zaremprediñ muioc'h-mui a labourerien-douar.

PENAOZ EO BET URZHIET AL LABOUR-EOST

Peurliesañ e vezean emsaverien unan hag unan e pep atant. Met ur strollad a veze krouet dre ganton, 4-10 a dud ennañ, unan anezho e karg eus ar strollad. E bautred a ouie peseurt karg en devoa, met ar gouerien a ouie kerkoulz all.

Bewech ma veze gelllet e veze kemeret un atant da ' ziazez ": ti ar c'houer en deveze hon harpet da gentañ hag hon heñchet etrezel atantoù all. En e di e veze graet peurliesañ an emvod kentañ etre al labourerien-douar hag an emsaverien-eost.

Goude-se e klasker sevel ur burev-ren dre ganton, e-lec'h ma c'hello studierien ha kouerien ingaliñ etrezo ar pezh a vo da ingaliñ. Tamm-ha-tamm e weler neuze ur c'houer hag a oa marteze abaf da gentañ, o kemer ar penn; gwelout a reer ivez re all o kilañ dirak al labour **bolitikel**.

Ar gouerien-emsaverien a oar da betra ez omp deuet. Ganto ha dindan o renerezh eo e klaskomp an atantoù all. Int eo a lavar dimp penaos e vez kont en ti ha war-dro, penaos en em gemer, penaos komz. Rak arabt eo mont re feals d'an dud : petra eo ur Mao-our evit un den ha n'en deus biskoazh lennet nemet an "QUEST-FRANCE" ?... Sklaeraat a ray an traoù a-nebeudoù, pa vo bet gwelet an emsaver war al labour-pemdez.

Start e vez al labour, hir an devezh, betek deur eur noz a-wechoù. Bodadegoù ne vez ket nemeur: pep emsaver a chom e-unan e-pad sizhunvezhioù, hep gwelout den all nemet ar gouerien. Neuze e wel ne gerzh ket ar politikezh amañ ken prim ha ma ra e kêr. An emsaver e-karg hag a zo war al labour er c'horn-bro a zeu da welout penaos e vez kont, pe e-unan, pe ur c'houer-emsaver gentañ. Kement-se a ziskouez e vez urzhiet-mat an traoù, hag a ro fiziañs d'ar re aonikañ.

D'ar Bodadegoù-Rentañ-Kont e teu kouerien, studierien ha micherourien. Eno e weler petra a soñj an holl, hag e krouer ur strollad emsaverien. Ar pezh a vez da ober eo: reiñ da c'houzout d'ar gouerien kement a vez bet klevet, kement a vez bet gwelet - dedannañ dalc'hmat kouerien all, zoken pa ne vez ket sklaer o menozioù er penn kentañ.

UR GUDENN GOUEST DA SKLERIJENNAÑ KUDENNOU ALL: AR RELIJION

" N'it ket d'an oferenn ? " a veze goulennet alies digant an emsaverien, morse avat, war un ton hegus. Bez'ez eus kalz a gouerien hag a ya c'hoazh d'an iliz, darn dre ma o deus feiz, darn evit gwelout mignoned, darn evit diwall a feukañ an dud.

Kalz anezho a zo bet er J.A.C. Gwreg ul labourer a lavare: " En ho touez-c'hwi ez eo ar Vao-ourien ar re daerañ. Ac'hanta! en hon touez-ni, ar re daerañ eus an emsaverien gatolik ez eo ar Jasisted kozh " (Ar re-mañ eo a zo er CDJA)

Ret eo derc'hel soñj mat a gement-rso.

+

Stourm ouzh an Iliz a zo d'ober, sur-mat. Rak an Iliz, gant ma vo heuliet an ofisoù, ha miret onest an diavaez, a zo a-du gant ar vac'herien, ar waskerien (en he skolioù kristen, he patronajoù hag all...) Emañ a-du

gant " Moral " ar vourc'hizien hag e tifenn diireizhder (displealded) bed ar vourc'hizien, peogwir e harz ouzh ar paour d'en em sevel a-enep... Met ar gouerien-emsaverien a oar mat kement-se. Int ivez a damall " Iliz ar Binvidien " ha tamall a reont ar Pab pa gondaon ar Sosialouriezh. N'eo ket eno emañ an dalc'h.

Ar pezh hon eus komprenet eo kement-mañ:: pep den a varn hervez e dro-spered hag e skiant-prenet. Ar Relijion, evit ar gouerien, a zo bet ur Vreuriezh, ur Barrez Unanet, desket he deus dezho en em strollañ...

Ar Relijion gristen he deus desket dezho zoken barn ar pezh a oa mat hag ar pezh a oa fall er Gevredigezh, ha klask an tu d'he gwellaat.

Ar pezh a gav ar gouerien diaes bremañ eo bezañ kristenien ha dispac'hourien war un dro. Unan anezho a lavare: " Ya, breudeur eo an holl dud... Met ar Patron eo mat terriñ e benn dezhañ: hennezh n'eo ket un den!"... Arabat ober goap, rak ar gouerien emañ o speredoù D KLASK, ha ne gredont ket e vefe sirius an hini a seblant bezañ mêret ha diluziet pep tra ("diwar skañv", emezo). Tamall ar Relijion krenn-ha-krak, a zo diskouez dezho ne zalc'her kont ebet eus ar boan o deus o'n em zistagañ diouzh kantvedadoù gevier...

Emsaverien'zo o deus kavet personed hag a oa " Paotred-araok ". Gant ar re-se e c'heller en em glevout. Unan anezho a " brone " er gador-brezeg an hini n'en devoa ket heuliet an dilezadeg-labour. Unan all a ginnige reiñ lojeriz d'hor c'hamaraded en e bresbital. Arabat ankounac'haat kennebeut ar skrid souezhus a lakas e miz Mezheven 1968 an holl Virourien da skrijal, hag a oa sinet gant an Ao.'n Eskob VIAL hag ar veleien a oa e-karg eus an Naoned hag eus Sant-Nazer. Ar skrid a oa a-du gant an Diasantourien, ar Gontestantourien, hag a lavare e teue an Diasant a-berzh DOUE : " Er Pantekost-mañ, er bloaz 1968, e tarzha ar Spered-Santel a-dreuz an Istor evit adnevesaat dremm an Douar. Hor gervel a ra holl d'en em dreiñ ouzh Doue: anez, ne vo peoc'h ebet !"

Evit klozañ, lavaromp ez eo al labour gant ar gouerien un dachenn luziet-tre ha leun a draoù-enep. Ne vo ket diskoulmet ar skoulmoù en ur ober fae warno : "Ar Relijion ? ur farsadenn "-ar Bersoned ? Evel ar brini: du ez int ha kentañ stlak a glevont e redont kuit " - pe : " Ar Relijion ? Louzoù-kousket evit ar Bobl ha netra ken !" . Diskiant eo spontañ ur gêriadenn a-bezh dre enabiñ ouzh ar Relijion. Ne cheñcher ket tu d'ar bed en un taol krenn. Ret eo deskiñ bevañ gant an dud, hep kuzhat na plegañ, met kerkoulz all hep feukañ na bezañ dalc'hmat o reiñ da c'houzout: " Ni, n'omp ket evel doc'h !"

KEMERDUT AR BED EVEL M'EMANÑ evit gallout hen advêrat, hen adstummañ. Klask peseurt goulennoù a zo e spered an dud, ha n'eo ket servijañ dezho war ur plad respontoù kavet ganimp-ni d'ar goulennoù a zo er hor spered-ni! Kompren penaos e vez BEVET gant an dud ar gudenn-mañ-kudenn, evit o skoazel-lañ da gavout an diskoulm.

War zigarez ar Relijion eo e lavaromp kement-se, rak enebiezh a c'hellfe sevel etre ar gouerien hag an emsaverien war ar poent-se. Met ken gwir all ez eo evit ar peurrest.

0

AN 'EMZIVIZO

Peurvuañ e veze aes digeriñ kaoz. Pa vezent o-unan, al labourer, e wreg hag an emsaver e sante buan pegement a draoù ne ouient ket. Fiziañs a save etrezo dre forzh bevañ ha labourat asambles bemdeiz.

Adalek an deiz kentañ e klaske ar gouerien gouzout petra a oa e penn an den deuet eus kêr da dremen div, teir pe beder sizhun ganto. Met gwelloc'h e tivizer war ar politikerezh pa vez bet labouret asambles, desket ober ur c'harrad, pe voueta ar moc'h. Dizvizout a reer pa sav c'hoant d'hen ober: e-kreiz ar vuhez e tivizer war draoù ar vuhez. Desket o deus an emsaverien labourat douar: setu ma'z int krog da zeskiñ penaos e labour spered ar re a labour douar. N'eo ket mat komz en un doare disheñvel diouzh hini an dud, ne reer nemet o estrenvaniñ ha seul-vui e labour an emsaverien gant ur renk-ad-tud, seul welloc'h ec'h ouzont komz ouzh an dud-se.

N'eus mar ebet, ar re o deus gonezet fiziañs ar gouerien eo ar re a oa ar c'halonekañ war al labour : " Evit sevel emziviz, eme Vernard Lambert, eo ret lakaat : labour graet a-unan, servijoù rentet, hag ivez harradoù sioulder"

DANVEZ AN EMZIVIZO : Hon holl strolladoù o deus gwelet e oa klañv-bras an ideologiezh vourc'hizel e-touez ar gouerien. Mar ne welont ket c'hoazh petra eo ar Gevredigezh Kapitalour , na penaos hec'h eilpennañ, da vihanañ ne gredont ken e tezenn ebet barrek d'o sachañ etrezek ar Kapitalouriezh. En amzer dremenet o deus lakaet ar vourc'hizien al labourerien-douar da grediñ e vije " soutenet ar prizioù ", pe emedo o silvidigezh en Traktor hag er mekanikoù all, pe o produiñ kalz (ha goude ne veze ket kavet gwerzh !). Kalz a falstezennoù a glever c'hoazh, met n'eus ket UNAN a vefe degemeret gant asant an holl, nag unan a lakafe un tamm bev er c'halonoù.

Tezenn an Uhelbriz? Uhelaat ar prizioù n'eo nemet pinvidikaat ar re binvidik, peogwir e vezont uhelaat da gentañ war eostoù ar re vras (an ed, da skouer).

Tezenn an holl labourerien-douar dorn-ouzh-dorn ? War zigarez o defe an holl gouerien er memes interest hag e tleont bezañ er memes sindikad, e lakaer ar re vihan hag ar re etre dindan veli ar re vras hag e vezont kaset d'en em gannañ evit ar re-mañ !

Dre ma koll an tezennoù-se hag ar re all o brud, e weler emañ en arvar galloud ar vourc'hizien. N'eo ket da lavarout emañ fizieñs an holl gouerien er sosialouriezh, met a bep tu emaint war zifiz ouzh ar Gevredigezh aozet evito gant ar Gevredigezh vourc'hizel. GOULENNOU a zo e spered ar gouerien hag a zo evit pezh a sell ouzh Urzh vat ar Vourc'hizien, dañjerusoc'h eget na vefe TAMALLOU ...

Ken alïes gwech ma vezemp gant ur c'houer dispac'hour, e tivizemp a wir galon ha diwezhat en noz. Gant ar re avat ha na oant ket aet ken don er politikerezh, e oa darn eus hor c'hamaraded hag a golle un tammig o fasianted : ne gomprenent ket ez eo ret lezel ar gouerien da glask ha da zizoleiñ ar respontoù tamm-ha-tamm. N'eo ket an emsaverien a zo da zegas " ar Wirionez ", ar respontoù " Graet-ha-tout ". Kement kouer a zo a sant ez eus traoù displeal (daspugn, rastellat douaroù, ïakomp), met ar pezh na welont ket eo e teu kement-se eus doareoù ar Gevredigezh kapitalour. Ac'hantal d'an emsaverien e vo diskouez dezho penaos n'eo ket bet daspugnet, rastellet an douaroù dre un taol-degouezh, na dre fallagriezh Pêr pe Baol, met DRE MA N'EUS DAREMPRED EBET KEN ETRE AN DUD NEMET AN ARC'HANT... Ha n'eo ket skouerioù eo a vank !

An emsaverien deut eus kêr o deveze poant o kavout skouerioù evit displegañ o soñj da dud ar maezioù.

A-hed o buhez, ar gouerien krenn ha bihan, o deus gouzañvet dre ma n'o devoa ket renk da gomz dirak ar re o devoa deskamant. Ha pa welont pegen diardoù ha pegen kalonek da labourat eo ar studierien, e klaskont gouzout perak eo deut ar re-mañ daveto. N'eo ket hepken hon emgann a glaskont anaout, met ivez penaos e vev ur micherour, ur studier... an darempredoù etre paotred ha merc'hed, hag all... Ret eo komz sklaer ha gwirion.

Pep tra a zle bezañ displeget sklaer ha gwirion. Arabat lavarout : " Ar Studi ? Me'ra foutre-kaer eus ar studi !", d'ul labourer-douar keuz dezhañ pa n'en deus ket gallet ober e studi!...nemet e vefe displeget dezhañ ivez peseurt fazioù a vez desket er skol ha da betra e talvez ar studioù -bourc'hiz. Arabat lavarout d'ul labourer-douar hag a blij dezhañ ober labour vat, e vez bet moc'het ur mekanik gant ar vicherourien, hep displegañ dezhañ petra eo an emgann a-enep ar Patron....

Komzet e veze eus ar Vietnam, ar Polis, an taolioù gwall-nerzh... E pep emziviz, tamm-ha-tamm, PA ZEUEMP A-BENN DA GOMZ AR MEMES YEZH ha da zisplegañ an eil d'egile ar pezh hor beze gwelet ha graet, e tostaemp an eil ouzh egile. A-wechoù all avat, ne gavemp tu ebet da gomz eus ar wir vuhez, ha ne zeue ganimp nemet tezennoù goulllo... Hon emzivizoù o deus evel-kent roet tu dimp d'EN EM ANADUT GWELLOC'H EVIT STOURM A-UNAN. Ur gammed int bet etrezek UNANIDIGEZH AR BOBL.

Tud eveldomp hag o deus bevet war bep tachenn, pep hini diouzh e du, buhezioù re zisheñvel, ne lakaint ket an traoù sklaer an eil evit egile, en ur ober teir sizhun. An emsaver ha na ra nemet tremen (kement-mañ a zo gwir dreist-holl evit ar studierien) daoust dezhañ bout labourer kalonek ha bet emzivizoù talvoudus, eo arabat dezhañ krediñ re vuan ez eo aet don e levezon. Degemeret mat eo bet labour-eost 1970 gant ar gouerien (hini 1968 ne oa ket). Emsaverien an eost o deus peurliviañ gonezet fiziañs an dud, met n'o deus graet c'hoazh nemet difraostañ labour. Emsaverien all, war an dachenn bemdeziek, a-unan gant ar gouerien dispac'hourien, eo a raio ar gwir labour en amzer-da-zont.

Notenn war an" EMSAVEREZ A-OR-PEP-TRA

E pep korn pe dost ez eus bet graet fazioù evel just. Ingalet eo bet peurliviañ an traoù tamm-ha-tamm. Ur gamaradez dimp avat (lakomp..Alis, kement ha reiñ dezhi un anv), he deus graet kalz gwashoc'h eget ur fazi. Alis a grede en Dispac'h, ar pezh a zo mat.

Alis a felle dezhi sachañ ar re all d'he c'hredenn: mat ivez.

Alis ne serre genoù ebet hag a dorre o fenn d'an dud. En ur ober tri devezh, setu displeget penn-da-benn ganti holl dezennoù an Dispac'hourien. Ha ken alies goulenn a veze graet e responte "... Gant ar fuzuilh !". Ar gouerien n'o d'oa ket ur ger da lavarout: ~~Alis~~ a ouie pep tra hag a zisplege pep tra. Kas a rae d'ar bloù Familh ha Relijion. Evel en ur gwall-huñvre, e kouezhe dindan he ~~taolioù~~-teod pennoù dic'houzouget tro-war-dro dezhi war an douar! Alis a oa ur gwir spontailh. Fallgalonet e voe ar gouerien, rak esperañs o doa bet el labour-eost. Eus an eil penn d'egile d'ar Morbihan e redas brud Alis, hag er wech-mañ o devoe poan an emsaverien boellek o plaenaat an traoù...

LABOUR AR SINDIKADOU - AL LEZENN - AN TAOLIOU GWALLNERZH

Niverenn Gwengolo 1970 ar gelaouenn " Vent d'Ouest " a embann listenn an"taolioù" graet en ur bloavezh e departamantoù hon eus labourer enno. Ar studierien hag ar vicherourien o deus gallet diouzh o zu kontañ d'ar gouerien o emgannoù... Met disheñvel a-walc'h ez eo ar stal ganto ha ganimp-ni.

1 - Ar Sindikadoù-labour-douar, war an dachenn, n'int ket ken bureviek ha ken reoliek ha ma'z eo re ar vicherourien; aesoc'h eo eta d'an dipac'hourien labourat enno. Sindikad-kanton ar C.D.J.A. eo a vez peurliesañ e penn an " taolioù-nerzh ".

2 - El labouradegoù, ar sindikadoù a laka disparti etre ar vicherourien: pa vez unan a-du, e vez egile a-enep. War ar maez, er c'hontrol, ar sindikad a stroll al labourerien. Ar " Baotred-araok ", dre ar sindikad, a ro da c'houzout petra o devez graet, hag a gas kamaraded da entanañ ar re all.

3 - E pep kumun pe ganton ez eo mestr ar sindikad dezhañ e-unan; ne vez ket ret dezhañ gortoz pennoù-bras ar sindikad " nasional " da c'hourc'hemenn petra da ober na penaos.

War ar maez eta, n'eus diforc'h ebet d'ober etre " An Emgann evit chom Bev " hag an Emgann Politikel ". N'eus netra d'ober nemet pignat eus an hini kentañ - hag a zo o ren bremañ - betek an eil. Ur c'houer a lavare e oa an " taolioù " ur wir skol, peogwir, emezañ, evit deskiñ neuilal ez eo ret mont en dour. Diwar an taolioù graet du-mañ ha du-hont a-enep displealder pe zislealder, e c'heller dougen an dud da enebañ dre vras ouzh Rouantelezh an Arc'hant, ar Gevredigezh kapitalour.

Setu ar pezh a lavare c'hoazh unan eus pennoù ha kiriegourien ar gouerien:

" Laouen omp o welout pet ha peseurt taolioù-nerzh a zo bet graet gant
 " labourerien-douar ar c'hornaù-mañ evit difenn o labour. Difenn hor
 " benveg a oa d'ober: an douar, hag a vez skrapet diganimp muioc'h-mui gant
 tud hag o devez gonezet arc'hant diwar goust tud hor micher (marc'ha-
 " dourien-douar, marc'hadourien-loened...) hag a sav goude-se gant an
 " an arc'hant-se atantoù bras. Neuze e teu an daspugnerien-douaroù-se" da
 " vezañ pennoù-bras ar vro a-drugarez d'o arc'hant ha d'o renk, hag e
 " reont d'ar re baourañ ac'hanomp plegañ.

" En amzer gentañ e oa bet fellet dimp derc'hel penn, pa welemp ar
 " gaou graet da hemañ: da henhont, hag e soñje dimp e veze bet deuet
 " hon tro da vat pe e veze aet da fall, hervez ar pezh a c'hoarveze: pa
 " ne blege ket an daspugner-douaroù, e soñje dimp hon deveze kollet
 " poan hag amzer...

" Diwaezhatoc'h avat, hon eus komprenet e raemp dreist-holl kement-mañ:
 " Deskiñ d'al labourerien-douar charreat o c'harr o-unan, ober i o-unan
 " o aferoù. Dre forzh en em vodañ alies, e teu pep hini da welout penaos
 " eo " sunet ", penaos ez eus en hon touez ivez darn ha na glaskont
 " nemet o mad o-unan. Deskiñ a reomp. Kompren a reomp....

" Ha pa savomp neuze taolioù all, e welomp sklaeroc'h gant petra ez
 " omp hualet: ar c'hoant da vevañ didrabas, zoken dindan ar wask;
 " doareoù klouar ar pennoù-bras : Me a vefe a-walc'h a-du gant ar
 " pezh a lavarit, met ne c'hellan ket mont penn-da-benn gant ar pezh
 " a rit..; an deskadurezh roet dimp evit doujañ d'an Arc'hant hag e
 " lezel da vezañ mestr war an dud.

Pa zispleger kement-se dirak an holl, e stumfer speredoù. Ne vez ket an holl
 a-du, anat eo! met graet e vez da bep hini dispakañ e venozioù. Ha n'eus
 douetañs ebet :

- 1 - e kompren an darn-vuiañ eus al labourerien-douar penaos emañ
 stad ar bed hag e fell dezho neuze derc'hel penn ha stourm.
- 2 - e laka an " taolioù-nerzh " c'hwen e loeroù ar zastellerien-douaroù.
 Aon a sav enno, hag e-lec'h labourat o douaroù o-unan e lakaont
 mêrourien.
- 3 - e weler sklaer ivez dre an taolioù-nerzh ne ra ar gouarnamant
 nemet harpañ Paotred-an-Arc'hant " . Bezañ engortoz e vimp-ni
 skoazellet gant ar gouarnamant a zo evidomp kement ha pleqañ d'ar
 marv.
- 4 - e vez krouet dre an taolioù-nerzh strolladoù gouest da zifenn ar
 vicher,

+

Dre emzivizoù, dre draktoù ha kelaouennoù al labourerien-douar, e
 welomp ar speredoù o tigeriñ. Taolioù-nerzh a zo bet kalz, ha studiet
 e oant bet a-unan, en a-raok . Pa voe falc'het diwar goust an daspugner-
 douaroù Jaconelli, er Morbihan, e Sant-Dole, eizh hektarad-maiz; pa
 voe lazhet gant poultr gwenn, e Forest-Fouenant, tregont hektarad
 fav-munut d'an daspugner-douaroù Guizioù; pa voe tremenet an alar
 dre bradoù ar breudeur Tribondeau e departamant Mezven (Mayenne)
 e ouie ar baotred oc'h ober petra edont ha penaos derc'hel penn ouzh
 an displealded. Ar vicherourien hag ar studierien a gav kalz a gouerien
 deuet da vezañ dispac'hourien.

o

Ya! met... AL LEZENN ? :

" Ret mat eo d'an dud gouzout ne wask al Lezenn nemet war un tu. Daou
 " vuzul a zo: unan evit ar re baour hag unan evit ar re binvidik. Enep
 " tud evel Trébondeau pe Jaconelli, ne c'hellomp netra dre al lezennoù,
 " Ar re-se oar c'hoari gant al Lezennoù " (bet lavaret e-pad un emziviz)

Pe c'hoazh : " Pezh a c'hellfemp ober d'an hirañ a vefe kas an daspugner-douaroù betek al lez-varn. Ha goude ? Ar gouerien n'int na barnerien na jureidi. Ar varnerien a varn hervez tezennoù ar gouarnamant a fell dezhañ sevel atantoù bras. (bet skrivet war ur gelaouenn labour-douar)

- Ar Polis a redo war-lerc'h ar falc'herien vaiz. Kondaonet e vezint ha Marsellin a vo en e vleud. Te avat, daspugner-douaroù, a gresko c'hoazh da vern! Ganit emañ an arc'hant, ganit emañ al Lezenn, ganit emañ ar fuzuilh... Ganimp-ni avat, emañ ar gwir justis " (Diwar un trakt)

Gwall-daolioù ? :

- " Ne glaskomp ket terriñn traoù dre blijadur, met pa reer gaou ouzhimp evel-se, ez eo ret kompren ne c'hellomp kaout fiziañs nemet ennomp honunan " (Bet lavaret e-pad un emziviz.

- " Kentañ a zo da welout eo kement-mañ: daoust hag en em glevomp war ar pal: en em gannañ ouzh ar brofitourien a bep seurt ? pe neuze o lezel da ober ? Ha mar fell dimp stourm ez eo ret kemer an tu: ne zeuimp a-benn a netra nemet dre an taolioù-dre nerzh ,ha taolioù kalet " (^o et skrivet war ur gelaouenn-labou-douar)

- " Gwir ha gwir-mat, me a zo un den sioul, met pa welan petra a ra ar bed-mañ ganimp, ac'hanta! e lavaran n'eo ket a-walc'h mont dezhañ gant ar forc'h... nann! n'eo ket a-walc'h gant ar forc'h...!" (Bet lavaret gant ur c'houer pa oa un emziviz o klozañ)

+

Hiziv an deiz n'eus ezhomm ebet ken da ziskouez d'ar gouerien ez eo RET en em gannañ, met e C'HELLER hen ober. Ret eo pareañ speredoù an dud trec'het, ar re a lavar e vo da viken tud paour ha tud pinvidik. Gaou eo kement-se, rak n'eo ket a-walc'h en em gannañ a c'hellomp ober, gallout a reomp ivez TREC'HIÑ !

Mar chom c'hoazh galloud ar gaptalourien en e sav, ez eo dre ma'z eo stlabezet an emsavourien a bep tu. Ar re a stourm ne stourmont ket a-unan, ne ouzont ket ez eus re all o stourm hag a c'hellfe reiñ dorn dezho. Pa weler pegement a daolioù-nerzh a zo bet graet e-pad ar bloaz, e c'heller kaout fiziañs en amzer-da-zont. Peogwir e verv an dispac'h e Frañs (e-touez ar gouerien, ar vicherourien, an holl re wasket) ez eo ret unaniñ ar stourmoù hag evit-se :

1 - da gentañ en em anaout, mont d'en em welout, reiñ traktoù ha kelaouennoù an eil d'egile.

Kêriz a zesker dezho ober fae dud ar maezioù: ar " Beizanted !
Peizanted treid plat ! Ne dalvez ket ar boan skoliañ anezhañ, trawalc'h a
 ouio evit chom da beizant !"

E-pad Mae-Mezheven 1968 ,nebeut a gouerien o deus kemeret perzh en
 emsavadey, ha darn eus an dispac'hourion, disorc'hennet, o deus kredet
 e oa nebeut a zanvez-dispac'hourien er gouerien, e Frañs, hiziv an deiz.
 Faziñ a raent. En ur ober daou vloaz eo deut an DIASANT, AR GONTESTADEG
 da ~~virviñ~~ kement e-touez ar gouerien ken e kaver testenioù a gemenet-se
 zoken e kaleouennoù ar Gevier hag an Arc'hant !

- Ya! a lavararn darn, met ar gouerien a zo nebeutoc'h-nebeutañ anezho
Respont a_reopp : renk ur rummad-tud en Dispac'h, en ur vro, ne da ket
 diouzh an niver a dud a vez ennañ, met diouzh o youl-dispac'hañ. Ar viche-
 rourien rusiat pe sinaat ne oa ket kalz anezho,ha daoust da gement-se e
 voent e penn-kentañ an Dispac'h.

Diwar-benn ar gouerien baour hag ^{ar} re etre, e Frañs e c'heller lavarout:

- 1 - eo ret dezho evit chom bev, en em gannañ.
- 2 - ne c'hellont ken nemet dont da vezañ proletourien.
- 3 - ez int gwasket, met int ne waskont den ebet.
- 4 - ez int dispont dirak ar polis.

Ar gouerien-etre hag ar gouerien baour eo ar re a zo an tostañ d'ar
 vicherourien. Dimp-ni, emsaverien a bep stad, ez eo diskar an dispartioù
 a zo o herzel ouzh ar re wasket d'en em unaniñ holl.

Paouezomp a huñvreal e tauio an trec'h ganimp diboan, dre un taol-chañs.
 Kalet e vo ar stourm. Ret eo dimp chom peg ouzh ar vuhez evel m'emañ, a-beñ
 gallout hec'h adstummañ. Al labour-emsav war ar maez en deus graet dimp
 plantañ hon treid en douar, diskouezet dimp ez eo ret poaniañ a-lazh-korf,
 ez eo arabat kilañ na spontañ dirak an diaesterioù. Diskouezet en deus dimp
 ivez e c'hellomp trec'hiñ war an diaesterioù.

AN TREC'H A ZEUIO GANT AR RE WASKET, RAK GANTO EMAN NERZH AR VUHEZ,
 NERZH AN NIVER, HA MAMMENNOU DIHESKUS AR SAKRIFIS, AN UHELVENNAD, AN ONESTIZ!

oooooooooooooooooooo

Goude-skrid: Er rentañ-kont-mañ en deus pep hini kalz traoù da zeskiñ.
 Petra a zo gwir ? petra a zo gaou ? Dirak stad hol labourerien a bep micher
 pere e tle bezañ, hervez an AVIEL, soñjezoù ur c'hristen ? Penaos e tle
 ren e vuhez hag e gomzoù ? Setu ar pezh a c'houlennomp digant KRISTENIEN
 VREIZH ha BELEIEN VREIZH

P. Bourdellez, beleg.

UNIVERSITY OF MICHIGAN LIBRARY